


bremañ 8 ru Hoche Roazon

bremañ

15 lur - miz DU 89 - niverenn 98

18 A VIZ DU : MANIFESTADEG E NAONED



DISTRO-SKOL E SKOL-VEUR BREIZH UHEL

Lizherou

Adkomanantiñ a ran d'ho
kelaouenn met fellout a rafe
d'ez respont d'an Aotrou Abel
Khedam.

Aes eo 'vit an aotrou A.
Khedam da dagañ ar stonegezh ha
da harpañ an OLP dre-holl er
bed, met petra a c'hoarvezfe
mar abegfe ur Breizhad an Islam
pe na harpfe emalc'h Israel er
broioù arabek ?

Farsus eo da welet Arabed
o koms a-sivout gwir ar pobloù
ha dieubidigezh an dud e pep
lec'h nemet en o broioù. Soñjal
a ran e enkaden ar Gopted da
shoer, ar vorianed ar Soudan,
e Mauritania hag all.

Alain Jotin (Laval)

Ur gerig diwar-benn ar
banell lakast e porzh ar Blokaz
e Rosko gant Kamb-Kemerezh
Montroulez : goulenet eo bet
gant Kevrenn an Darempredoù E-
trekeltiek da lakat ar banell-
se met gant ar brezhoneg war ar
renk kentañ. Divizet eo bet, hep
kousaal gant Skol-Uhel ar Vro,
da lakat ar brezhoneg war an
drede renk gant Kamb-Kemerezh
Montroulez...

Kenavo.

J.Y.an Touz (An Oriant)

Tro am eus bet da anavezout
ho kelaouenn pa oan e Breizh, ha
dedennet-bras an ganti. Dedennet
on bet en un doare ispisial gant ur
pennad eus niverenn miz here :
"Breizh-Kompostella 89", marteze
peogwir e lenne ivez d'am bro-me,
Bro-Spagn.

Un tammig souezhet on bet
koulskoude pa ne soñje ket din e oa
eus BREMAN ur gelaouenn o plediñ
gant avierezh pobl Vreizh. A-hend-
all on bet dedennet meurbet gant ul
lodenñ eus ar pennad-se, re verr
siwazh, diwar-benn "Doue hag ar
brezhoneg". Plijet e velen bet o
c'houzout pelloc'h -daoust ma n'eo
ket labour BREMAN marteze -petra
a soñj an Aotrou Doue diwar-benn ar
brezhoneg". Pouezus-bras eo ar
gudenñ-se, hag a c'halle marteze reiñ
deomp un diskoulm evit ar pezh a sell
ouzh kudenñ rannyezhoù ar
brezhoneg da skouer, hag ivez
diskouez deomp an hent evit ar
stourm a zo da gas evit dazont ar
brezhoneg.

Trugarezh bras deoc'h neuze
evit ho labour kelaouañ an dud diwar-
benn ken bras kudenñ, ha ra vo an

Ao. Doue ganeoc'h ha gant ar
brezhoneg.

Pilar de las Vegas de Matutí
Tarragona, Spag

Keneil ker,

Get aked eo em eus len-
net an danevell-skrid diwar-
benn pirc'hirinerzh ar re ya-
ouank da Compostella e niverenn
Bremañ 37 (miz Here 89), hag e
karehen laret daoc'h petra a
soñjan diwar-benn an diouer a
vreshonegerien a zo oast du-
hont.

Pa lârn T. Argad e voe di-
aes kas an traoù en-dro e Bre-
zhoneg penn-da-benn, en em
c'houlenñ hag en deus aneet
da culet ur wezh en e vuzeh pe-
rak ned eus ket kalz mutoc'h a
vreshonegerien hiriv an deiz
hag a zo gouest da bediñ an Aot-
rou Doue e Brezhoneg.

N'eus namaet ur respont
d'ar gudenñ-mañ : Emalc'h an
iliz katolik e Breizh.

A-hed bleadoù he deus an
iliz nac'het ma vo troet ar
Bibl e Brezhoneg ha lakast etre
daouarn hon tud. Sur-on-me e
oui pep beleg an dra-mañ...

El-just e oa lakast le-
urioù kantikoù ha Buzeh ar Sent
etre o daouarn mes ne oa ket
travañc'h. A-c'houde pell'zo o
deus komprenet ar Gembreiz an
dra-mañ.

Tud Kembre n'int ket di-
zesk ar o yezh al m'eo ar pep
brasañ ag ar Vretoned a out
Brezhoneg.

E 1588 e oa bet troet ar
Bibl e Kembraeg get William Mor-
gan. En tu-hont da se e teuas
ar Bibl da vont ar Gwir LEVR-
DESKIN azeñt an holl bobloù tra
ma chome ar Bibl ul Levr BERZEV
aveit ar Katoliked.

Arabat disoñjal kernebeut
ez eo a-drugarez da skolioù ar
Sul bet savet ar-dro bleadoù
diwezhañ an XVIIIvet kantved ez
eus bet desket d'ar vugale ha
d'an dud krenn lenn ar Bibl e
Kembraeg.

Setu perak e kaver kalz
mutoc'h a Gembreiz ken barrek
da lenn ha da skrivt o yezh.

Oest ar pezh a sell
douzh ar relijion ez eus
c'hoazh kalz a chapelioù e Kem-
bre a-bezh e-lec'h ma vez impli-
-jet ar c'hembraeg epad an o-
fisoù.

Hag e Breizh ? NETRA. Pe
war ur wezh an amzer aveit ur
pardon bennak e-pad ar vakañsoù
-hañv... aveit an douristed...

Petra 'ta o deus gwaet
beleion Breizh a-hed bleadoù ?
Daoust hag o deus kendalc'het
da bresgeññ e Brezhoneg ?
NANN. Kavet o deus gwelloc'h
implij yezh Paris, yezh an a-
Louberton, yezh ar re a nac'h
ma vo skoliet hor vugale e Bre-
zhoneg.

NE FAOT KET DEOC'H-C'HWI
ANKOUAAT EZ EO ILIZ KATOLIK BRO
C'HALL REN JAKOBIN HA GOUARNA-
MANT BRO C'HALL !!!

Ar an tu arall e ouimp
eo bet troet holl levrioù ar
Bibl e Brezhoneg a-drugarez
d'an Tour Tan. Mat eo, sur-
salc'h, met petra a dalv al la-
bour-mañ ha ne vez ket mui im-
plijet ar Brezhoneg en ilizoù
bep sul ?

Na venn Kristenion Breizh
hag ar veleion en o mesk, AD-
VREZHONEGIN an Iliz Katolik e
Breizh e vo ret dezhe labourat
get started ha kendero'hel da
stourm douzh nac'hadenn beleion
hag eskibion 'ho gober get ar
Brezhoneg en o ilizoù.

A galon vat genoc'h c'hwil

Alan Herve (An Oriant)

Lizher

Ur profig evit Ahmed KHEDAM



Anshel BABEL

Manifestadeg

NAONED



Er bloaz tremenet ho peus kemeret perzh e—barzh ar stourm evit an D.E.U.G. brezhoneg. Hep o sikour
ne vefemp ket deuet a—benn da gaout anezhan. Ho trugarekaat a reomp, a greiz kalon evit ho skouzell !

Er bloaz—mañ e klaskomp mont e darempred gant ar ministrerezh evit breutaat gantañ war
bolidikerezh ar brezhoneg dre vras en Deskadurezh. Dav eo deomp mont goustad, evit natenn spontañ an
dud atebek ...

N'eo ket evit se e tleomp chom sioul o c'hortoz o bolontez vat. Kudennoù resis 'zo da ziskoulmañ war
an dachenn. Soñjet hon eus e oa poent pouezañ war hini ar brezhoneg hag hor sevenadur e Bro—Naoned.

Neuze, dozet e vo d'ar sadorn 18 a viz Du 1989, da 3 eur, e NAONED ur VANIFFSTADEG gant kirri, war an
temoù :

BRO-NAONED E BREIZH ! AR BREZHONEG E BRO-NAONED !

Difenn hor sevenadur hag hor yezh e Bro—Naoned eo difenn Naoned e Breizh war un dro, o vezañ -
peurgetket - e vez graet digesterioù d'ar skolioù o deus c'hoant da zeskin brezhoneg, war zigarez emañ al
Liger-Atlantel e "rannvro Broioù al Liger" ...

Gant Unvaniezh ar Gellennerien Brezhoneg hag ar c'hc.U.A.B. (Kuzul evit Unander Melestradurel Breizh)
eo bet savet ar raktres ; dibunadeg eus Skol—Veur al Lizehiri betek 11 Kuzul an Departamant, dre ar Rektori
hag an Ti—Kêr. Goulenet hon eus bezon degemeret ganti ar pennoù bras.

Er stourm evit an D.E.U.G. he deus dispignet U.G.B. 15 000 lur (ur milion hanter santim). Diaes e vo dezhi
kenderc'hel e—giz—se, rak ne resev yalc'had ebet ganti den ... Ar c'hc.U.A.B., d'e du, n'eus kazi gweneg
ebet. Neuze e c'houlenomp ganeoc'h skouzellañ ac'hanomp war boent an argant ivez. Ho trugarekaat o
reomp en a—rak !

DEUG BREZHONEG, BLOAVEZH KENTAN

80 ENSKRIVADUR



Per Denez, Kelenner er Gevrenn Geltiek

Maraton an Enskriñ

D'ar Merc'her 18 a viz Here, d'an deiz ma c'hellid lenn e pajennoù kazetenn bemdeziek nemet Bro-Roazhon ne oa bet nemet "16 studier" o lakaat o anv evit an DEUG brezhoneg, edo kelennerien kevrenn geltiek Skol Veur Breizh Uhel gant o zrede devezh o tegemer enskrivadurioù ar studierien brezhoneg evit an DEUG nevez, ul labour a vez graet gant ar sekretourezed er c'hrevrennoù all.

"Diwar hon skiant-prenet", eme Lukian Kergoad, unan eus ar gelennerien eno, "n'eus nemedomp, disazerien an DEUG, a c'hell aliñ ar studierien da vat, ha reiñ un titour klok dezho diwar-benn ar c'hentelioù a ginnigomp evit ar bloaz. ouzhpenn-se eo un dra vat dimp gwelout hon studierien ha gallout divizout un tamm ganto arak stagañ gant ar c'hentelioù."

E fin an trede devezh-se eo 42 studier o doa laketao o anv war an DEUG brezhoneg.

42 a studierien, n'eo ket vil, pa anavezet n'eo nemet e miz Eost eo bet embannet e oa krouet an DEUG nevez, met n'eo ket oc'h c'hoazh 80 studier en holl eo a vo enskrivet a-benn fin miz Du !



Lukian Kergoad, Kelenner.

chom c'hoazh un 30 all, aotreet gant ar skol-veur da lakaat o anv, a zo o c'hortoz er gêr al lizher d'o fedañ da zont betek Hoazhon, da enskrivañ da vat.

E miz geñver e c'hallor gwelout un nebeut studierien ouzhpenn o tont da lakaat o anv evit an DEUG brezhoneg, hervez an dibab int aotret d'ober goude un trimiziad kentelioù er skol-veur.

Evit bremañ, diwar ar 80 gortozet e ouezer e vo un 30 bennak o heuliañ reoliek ar c'hentelioù, ar pep brasañ anezho bachelourien nevez, ar re all o vezañ tud war o micher (kalzig en deskadurezh evel-just), e Breizh pe en diavaez, ha ne vint gweliet nemet da vare an arnodennoù.

Un tamm mat yaouankoc'h eo an dud enskrivet er bloaz-mañ en DEUG (23 bloaz an oad keitad) eget ar re o doa laketao o anv e bloavezh kentad an aotreegezh (33 bloaz an oad keitad) e 1982.

Ar Studi

E-pad 2 vloavezh-studi an DEUG e ya an hanter eus ar gelennered gant studi ar yezh. 3 live zo bet aozet evit studierien ar bloavezh-kentañ, hervez o barreezh oc'h erruout er skol-veur, rak darn anezho n'o devez ket heuliañ kalzig a gentelioù brezhoneg e-kerz o bloavezhioù-lisa !

DEUG BREZHONEG



Ur gentel Kembraeg gant studierien war an aotreegezh

An hanter all eus ar gelennered ya gant kentelioù lennegzh, sevenadurezh pe yezhoù all (kerneveg, kembraeg hag iwerzhoneg a vez kinniget er gevrenn); un tamm galleg a zo ret studiañ evit an DEUG ivez "achanta, tu zo da zibab "lennegzh Vreizh e galleg" kinniget gant ar gevrenn geltiek.

Kelennerien nevez zo erru er bloaz-mañ er gevrenn : Gwenael an Dug, bet kelenner saozneg, ha Frañsez Favereau, bet o kelenner brezhoneg ha saozneg, a zo deuet da greskiñ skipailh ar gevrenn m'emañ Per Denez, Kristian Gwionvarch Yann-Beñ Piriou ha Lukian Kergoad o kenteliñ. Skoazellet e vezont gant kelennerien all : Alan Botrel ha Herve Bihan eus ar skolioù-stad, gwendal Denez, eus ur skol brevez, Morwenna Jenkin, eus skolioù Diwan Brest, hep ankouaat Gwenole ar Menn, eus ar CNRS, J.Y. Urien, eus Kevrenn Yezhoniezh ar skol-veur, hag ar c'helenner iwerzhoneg nevez, Diarmuid Jameson, ur brezhoneger anezhañ ivez.

Hag an dazont ?

Daoust ha kement a dud a vo er gevrenn er bloavezhioù da zont ? Ya, a vefed lechet da respont, pa soñjer

ne oa ket brudet a-zoare krouidigezh an DEUG brezhoneg, hag e vo graet gwelloc'h gant Skol-veur Breizh Uhel a-benn bloaz.

Koulskoude n'eo ket sur, kement-se a vo diouzhal labour graet gant ar gelennerien vrezhonek er skolioù eil-derezh, diouzhal labour a c'hellio bezañ kavet gant ar studierien er re a penn o studi, ha diouzhal ma vo goulet, pe nann, un DEUG brezhonek gant Skol-veur Brest.

Gant an holl dudennnoù-mañ eo feil d'ur gevredigezh nevez plediñ, ur gevredigezh studierien na feil ket dezho chom da selout war o c'hiz :



bremañ 5

DAZONT eo-hi anvet. Bodañ a ra studierien eus ar gevrenn geltiek, kenkoulz hag eus kevrennoù pe skolioù-meur all, labour zo ganti !

Yann Leskildri


* evit gouzout hiroc'h e c'haller skrivañ d'ar gelennerien pe da gevredigezh ar studierien, e KEVRENN GELTIEK, SKOL VEUR BREIZH UHEL, BALI GASTON BERGER, 35000 ROAZHON.

* Capes : betek an 10 a viz Du e c'hallit lakaat hoc'h anv. Ur post a vo da vihanañ.

TRO BREIZH AR SKOLIOU

Krog omp eta gant tro Breizh skolioù DIWAN evel hon doa kinniget deoc'h ar miz tremenet. Evit stagañ ganti hon eus soñjet lakaat ac'hanoac'h da ober anaoudegezh gant an div skol nevez digoret ar bloaz-mañ : hini Kemperle hag hini Kraozon. ■

Dominig Jolivet



UR SKOL DIWAN NEVEZ E KEMPERLE

Div skol DIWAN nevez a zo bet digoret ar bloavezh-skol-mañ. Unan e Kraozon e kornog Kernev hag unan all e Kemperle e Gevred Kernev.

Daouzek a vugale a zo bet degemeret e skol DIWAN Kemperle ar bloaz-mañ. Ar skol, lec'hiet e batisoù kozh servijoù teknik ti-kêr Kemperle, 4 stradaed J. Pasteur, a zo bet kempennet gant sikour ti-kêr Kemperle. Met ar pep brasañ eus al labour a zo bet kasel a-benn gant tud a youl-vat kuzul skoazell DIWAN bro-Zuig.

Al lec'h 'zo plijus-tre, e-tal plasenn Sant Mikêl, plasenn vras Kemperle. Diabarzh ar skol 'zo naet ha kempennet mat, gant livioù kaer er c'hias hag er sal-kousket. Kroget eo bet mat ganti eta !

Abaoe penn kentañ ar bloavezh skol, ar vugale 'zo aet, aliesik mat, er-maez eus ar skol : d'ar mare'had evit prenañ frouezh, da welañ-dennin un ti-feurm, hini Roland Perron, ar c'haner brudet. D'an ti-post, da gas ur pakad evit bugale Skol DIWAN An Oriant. Eskemmoù a vo etre hon skol-ni, hag honnezh ar bloaz-mañ.

Klask a ran digeriñ ar skol, war ar bed endro dezhi. Mont a reomp er maez eus ar skol hag e Klaskimp degemer brezhonegerien ivez.

War an 12 a vugale, 8 a zo dindan 3 bloaz. Dav eo brezhonekaat anezho ar buanañ ar gwellañ, Impijout a ran, evit dont a-benn a gemant-se ; savadennoù diapioù, amprestet digant ar CDDP, o tennañ d'un tem a "studiomp" mare-mañ-mare. Evit deroù ar bloavezh-skol hon doa dibabet hini an avaloù. Bemdez e sellomp, e-pad ur frapadig, ouzh diapioù. Bemdez e vez ivez, un diviz etrezomp ; a-zivout traoù degaset, ganin pe gant ar vugale, d'ar skol. Desket 'vez, evel-se, tamm ha tamm, ar geriaoueg brezhoneg. Gant dansoù, c'hoarioù e vez graet ivez.

Ar skol a ya en-dro dre mod ar "c'hias ateoerou" evel e meur a skolioù-all, hag ur pezh tamm kousk a reer goude merenn hag a ra vat d'an holl evjeljust.

Setu barr ha barr, war a weil, un dampskeud eus ur vuhez a renomp er skol.

Herve Gall, skolaer DIWAN Kemperle

istor krouidigezh skol Diwan Kemperle

Kroget e voe an traoù d'ar 26 a viz C'hwevrer 1988. Un emvod digor d'an holl a voe aozet e Pont Aven gant skolioù Tregon ha Banaleg. Ur mare diaes a oa evit DIWAN d'ar poent-se : derc'hel a rae ar skolaerien da gelenn hep goap, o vezañ na nac'h ar stad anaoudegezh zout skolioù DIWAN. 80 den o doa kemeret perzh en emvod-se, ar pezh a brou e tedenn DIWAN ouzhpenn eget ar familhoù hag ar c'hopridi.

E dibenn an diviz e c'halvas Claude FOLLEZOU eus Moelan an holl re a oa prest da zifenn ha da skoazellañ DIWAN da vont e darempred gantañ evit gwelet petra ober.

Evel-se e voe krouet "MAD" d'ar 16 a viz Meurzh 1988. Pal ar gevredigezh-se a oa kelaouiñ tud ar vro diwar sistem pedagogel DIWAN hag ar pezh a laka anezhañ en arvar. Emvodoù kelaouiñ a voe aozet e Moelan, Kloar, Kemperle 'lec'h ma kemerjont perzh dilennidi. Berzh a reas an emvodoù-se. Diskouezhet o doe splann pegen dizek e oa an dud war DIWAN. Dizoloñ a rejont interest an divyezhezh Brezhoneg/Galleg ha merzout a rejont e oa DIWAN un embregerezh gvir hag a zlee bezañ meret evel-se. Deskiñ a rejont ivez ez eo dedennet ar familhoù muioc'h-mui gant skolioù DIWAN, ar pezh a laka niver ar skolidi da greskiñ ha kompren a rejont ez eo ret kaout ur bersonelezh kreñv e-barzh Europa da zont.

Ur soñj a zivannas: krouidigezh ur skol war tachen Kemperle-Moelan-Kloar ; ur soñj a zeuas divvezhatoc'h da vezañ pal ar gevredigezh.



Gemperle a asantas prestañ anezhe deomp.

Kinniget e voe ar raktres hag ar raktres digor d'an holl reas al labourioù bras. E-pad teir sizhun divvezhañ miz Eost e labouras un ugent bennak a dud a youl vat, renet gant un trisavour a youl vat ivez. Kempenn, livañ, naetaat... en diwez e voe prest ar skol d'ar 4 a viz Gwengolo.

Ne rae nemet krogiñ. Ret e oa kempenn al lec'h evit degemer ar vugale. Kêr Kemperle a reas al labourioù bras. E-pad teir sizhun divvezhañ miz Eost e labouras un ugent bennak a dud a youl vat, renet gant un trisavour a youl vat ivez. Kempenn, livañ, naetaat... en diwez e voe prest ar skol d'ar 4 a viz Gwengolo.

Hiziv zo 12 bugel er skol. Laouen avalc'h omp gant disorc'h al labourioù. Gallout a reer lavaret eo ur skol vrav ! Roz ha gver.

Lod brasañ an arbeurei zo bet roet gant kêrioù Rieg ha Moelan. Ar rest zo bet prestat gant kêr Vellag. Paet eo bet an danvez pedagogel gant ar C'huzul skoazell.

Evit ober war-dro ar vugale emañ Herve Gall eus Rostrenen, sikouret gwech an amzer gant un danvez-skolerez : Beatrice Moign. Div skoazelleres a ra war-dro an diwallerezh hag ar c'hargoù all : Isabelle Rouzic ha Joelle Ribarszick.

Evel-just e chom kudennoù da renkañ, met ar familhoù nevez, bodet en ur gevredigezh, zo startijenn kalz enne. ■

E miz Gwengolo 1988 e voe desidet digoriñ ar skol-se a-benn an distro-skol '89. Beze oa dija teir familh a gase o bugale da Dregon ha Banaleg. Bruderezh a voe graet azalek ar mare-se dre ar c'helaouennoù o c'houllenn digant ar familhoù mont e darempred gant ar gevredigezh.

D'an 11 a viz Here e voe savet "Kuzul skoazell Bro Zuig-Kemperle" karget eus al labour da gas da benn evit digoriñ ul lec'h. Maer Kloar a ginnigas deomp ur skol war laez porzh Doelan lec'hiet en un endro dispar.

Emvodoù kelaouiñ a voe savet en-dro, evit an dilennidi ar wech-se. Berzh a reas an emvodoù-se dre labour ar C'huzul skoazell. E Kemperle e voe unan. Un ugent bennak a zilennidi a zeuas. Unan all e Konk-Kernev, ne zeuas ket kement a zilennidi met a-bouez e voe mestra. Pennadoù e-leiz a voe embannet er c'helaouennoù. Pal

ar c'helaouerezh-se a oa roñ eus DIWAN ur skeudenn a-vremañ ha bev. Kema ar soñj amsklaer ha negativel a-wechoù o doa an dud war ar gevredigezh. Pep emvod a voe framet evel-se : prezidant DIWAN, pe unan en e anv, an teizorer, ur skolaer, prezidantez ar C'huzul skoazell hag un den karget da roñ lañs d'an diviz war perzh ekonomikel ur bersonelezh kreñv e-barzh Europa da zont. Ur film video war skol Tregon a skeudenne an diviz.

Heuilhet e voe an emvodoù -se gant emvodoù digor d'an holl a oa o fal kelaouiñ c'hoazh hag ivez tutañ familhoù nevez.

Darempred reoliek a veze gant an dilennidi kêr, dreist-holl re Kemperle. E Doelan e vefe bet kudennoù kas-degas ar vugale, n'eo ket ul lec'h kreiz Kemperle e seblante bezañ aes evit an holl. Un diskouls a oa evit al lec'h : batisoù kozh ar servijoù teknik e kreiz-kêr. Kêr

BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

59, hent

KERDRONDU VIVAN

29000 Kemper

KOUMANANT BLOAZ 100 l

SKOAZELL : adalek 150 lur.

TRO BREIZH

Skol Diwan Kraozon



Istor DIWAN Kraozon

Dibenn miz Mae darempredenn gentañ gant DIWAN Breizh

6 a viz Even : emvod kelaouiñ gant Y. Raoul, rener DIWAN, L. Donnal, DIWAN Breizh hag H. Kerrain, rener pedagogel, 3 enskrivadur.

13 a viz Even : emvod meur gant L. Donnal ha R. Treger

20 a viz Even : diviz gant Cozan (Depute), ar maer, an dilemmidi, etre an 21 hag ar 25 a viz Even : klask ul lech, en aner.

25 a viz Even : darempred gant komite merañ merenn ar skoldi. 9 bugel enskrivet evit dibenn miz Even

25 a viz Gouere : asant dre gomz gant Cozan evit un ti.

29 a viz Eost : lakaat a ra Cozan an ti e-karg kêr Kraozon a brest anezhañ deomp.

30 a viz Eost : reiñ a ra deomp ar Gomon ur yalc'had dre vogel evel d'ar skolioù all : da lavaret eo 4500 l ar bloaz evit 11 bugel.

Paeañ a ra ar gevredigezh an dour, an tredan ha kempenn a ra al lech.

Respont ebet evit ar c'hargoù all (tommañ...)

31 a viz Eost : kemer a reomp an arebeuri-skol e Brest.

Distro-skol d'ar Yaou 6 a viz Gwengolo.

17 a viz Eost : Fast-noz, gounid 5100l.

E miz Gwengolo : nac'hañ a ra komite merañ merenn ar skoldi degemer bugale DIWAN. Ar skoldi all a vez degemeret bep kreisteiz e skoloù Kraozon.

Gwener 22 a viz Gwengolo : merenn ebet choazh.

10e : pellegomzadenn d'ar c'huzul Departamant evit goullenn o all : meret e vez ar skoloù gante.

10e20 : gervel a ra ar c'huzul Departamant evit lavaret e chellomp mont da greisteiz d'ar skoloù evit merennañ. (Rener ar skoloù eo Maer Kraozon.

Digoret he deus skol DIWAN Kraozon he doriou d'ar Yaou 6 a viz Gwengolo 1989 (distro-skol d'ar 4). Un devezh vakañsoù ouzhpenn hon eus roet d'ar vugale a-benn laosker ar vicherourien da achuiñ o labour kempenn an ti-skol.

D'ar Yaou e oa bet degemeret ar skoldi en ur seurt "karrdi". Un distro-skol hep freuz na reuz diouzh perzh ar vugale daoust d'al lech ispisial.

Kemeret o doa ar vugale (etre 3 ha 5 bloaz) plas tro-dro d'an taolioù lakaet er sal ha kement-se didrouz. Anzavout a ran bezañ bet un tamm bamet rak o sioulder.

E-pad an dihan eveljust e oa aet an teodoù en-dro ha diouzhtu e oa en em lakaet ar vugale a-gevret. Deuet e oant davedon hep mar, pijs-tre int.

Evit pezh a sell ouzh digas ar yezh 'm eus gofzet al Lun war-lec'h evit krogiñ gant ar Brezhoneg. Kavout a ra din e oa ret kaout ur pennad en em ober eus ar skol a-raok. Diouzh ma zu 'm eus bet kalz a labour : goulo e oa ar chlas, ret e oa soñjal e pep tra hag ouzhpenn ober war-dro ar velestradurezh.

Hiziv hon eus chañs da gaout ul lech brav kempennet a-feson. eveljust ne implijant tost mui ar Galleg ha ne seblant ket spontañ anezhe, er c'hontrol, dedennet-tre int.

Menegiñ a ran ivez madelezh ha labour tud ar vugale, hepte ne vefe ket ar skol ar pezh eo hiziv.

Soaz Sergent, skolaerez DIWAN Kraozon.

Lennit al liamm

Skrivañ da : AL LIAMM
16, straed des Fours à Chaux
35400 - SAINT MALO -

Koumanant bloaz 120 lur (studierien, tud dilabour : 100 lur)

STOURM AR BREZHONEG

Strollad St Malo

Strollad SAB Sant-Malo a zav 55 panell livet d'an noz 20 a viz here war an hent bras e-kichen Sant Per Plesguen.

Stourm Ar Brezhoneg

MANIFESTIN

Manifestiñ a vo graet gant izili Stourm ar Brezhoneg, en Aire, d'ar Sadorn 16 a viz Kerzu 1989. Evit an holl re o deus choant gwelout panelloù brezhonek war hantou hor bro hag a car ne zeio ket ar panelloù-se mar chomont er gêr, emgav d'ar sadorn 16 a viz Kerzu da 3 e war blasenn an Ti-Kêr, en Aire. Deuit niverus ! Fest-noz a vo da heul.

J-Y Meudeg DIEUBET

D'al Lun 23 a viz Here da noz ec'h adkave Jean-Yves MEUDEG ar frankiz. Harzet e oa bet d'ar 6 a viz Even a-samblez gant Gilbert CABON a chom eñ en toull. Perak n'eo ket bet dieubet ivez hennezh ? N'eo ket peogwir e ra eñ gant ar Brezhoneg, e yezh ? Daoust da goullenoù kalz a dud : kevredigezhioù, dilennidi, hini-ennoù, e dalc'h ar barnor da nac'h ouzh Gilbert CABON ober gant e yezh ha da c'hervel ur jubennour. Un tamm mat a vrezhonegerien o deus en em ginniget koulskoude.

EMGANN, diouzh e du, en deus embannet bezañ "laouen eus dieubidigezh Jean-Yves MEUDEG" ha goullenn a ra na vefe "dieubet diouzhtu Gilbert CABON ba c'het evit an hevelep abegoù ha roet deshañ ar gwir da ober gant e yezh, ar Brezhoneg".

Gwenael Caradec



FOAR AR C'HEVREDIGEZHIOU

Ar foar-se a oa bet e Brest da geñver gouel St Mikael d'ar Sadorn 30 a viz Gwengolo, d'ar Sul 1añ ha d'al Lun 2 a viz Here. Pedet e vez an holl gevredigezhioù gant an Ti-Kêr da zont da ginnig o oberezhioù da dud Vrest e-pad an tri devezh-se, bep bloaz. Ar bloaz-mañ avat e vanke ur gevredigezh : Oaled St Erwan an hini eo.

Nac'het e oa bet ouzh ar gevredigezh kristen ha brezhonek kaout ur stand er foar en abeg m'o doa, warlene, lakaet war ziskouez poltre Yann-Vari Perrot; Aet e oa un nebeut rezistanted kozh da glemm d'an Ti-Kêr goude-se, ha sed aze an disoc'h... Bro ar frankiz, emeze !

TAILHOU

Mar kavit gwelloc'h reiñ hoch arc'hant d'an emsav eget d'ar gouarnamant gall e ch'allit kas roadou d'ar gevredigezh "Brezhoneg Dalc'hmat" a skozeall hor yezh hag a gaso deoc'h un testeni a roy tu deoc'h da gaut digresk war ho tailhoù. Evit-se e ch'allit goullenn diskliendarioù gant "Brezhoneg Dalc'hmat" (Traon ar Ru, 22300 Bulien) pe larout d'ho park reiñ arc'hant bep miz war gont ar gevredigezh "Brezhoneg dalc'hmat, OMB Lannuon KreizKêr, 22300 Lannuon, kont 106 426 1440, alchwezh RIB 85, anavez ar bank 15 584, dominek 22 805).

MARC'HAD

"Hini Breizh"

Biskoazh kemend-all ! Ur gwin ruz eus Anjou anvet "Le Breton", kartenn vreizh war ar baperenn, ha brezhoneg war ar gartenn ! Satu pazh am eus kavet en ur stal-evajoù eus Roazhon an deiz all. Gortoz ! N'eo ket echu ! Ur pennad brezhoneg a-geñver d'unan all gallek 'zo war gont ar voutailh, hag e tispleg deoc'h eus pelec'h e teu an anv "Le Breton"-se.

Un intrudu brav a vefe mat gwelout e Breizh ivez, gant brezhonegerien o kinnig o ampartiz en o yezh d'an embregerezhioù, gwellañ doare da vrudañ ar brezhoneg er c'henwerzh.

A hend-all, evit 18 lur, e c'hallfed kavout gwelloc'h gwin ruz, graet e Breizh zoken. E ti Cave Express, 46 kae St Cyr, 35000 ROAZHON

Bodadeg Veur Gwezenn a vo dalc'het d'ar Sadorn 4 11 89 e sal St Leon e Glenag (e-kichen Redon) da 17 noz.

KENTELIOU BREZHONEG E LANDERNEV

e Ti an Holl, 22 straed Jean Louis Rolland, pg. 98.21.66.93

KENTELIOU BREZHONEG E LESNEVEN

Aozet int gant ar gevredigezh "Evit ar vreztoned", ha dalc'het e vezont er greizenn Sosio-Sevenadurel.

2010

STAJOU WAR AN URZHIATAEREZH

35000 Roazon - Da gaut titouroù skrivit da : OSCAR X2000 Pôle Central - 6 bali ar Unanet-35043 Roazon Cedex - pelli : 99-35.11.11.

KUDENN AN DIV ALAMAGN

UR VRO, DIV STAD



Kalz trouz a vez graet an deiz a hiziv diwar-benn Bro-Alamagn; diwar droc'h ar vro-mañ etre div rann, hini ar Sav-Heol hag hini ar C'huzh-Heol komunour.

Kompren a ra tud broioù Europa ar Sav-Heol perak ez a kuit pobl Alamagn ar C'huzh-Heol diouzho bro betek hini ar Sav-Heol; n'eo ket skiantek, tamm bet, rannañ ur vro undoare etre div vro disheñvel, emeze.

Trouz a vez graet adarre diwar c'hallusted adstagan assemblies an eil vro ouzhi eben, hag a-du on-me ivez, ne vefe ket sol!

Met ar pezh ne oar ket tud Europa ar Sav-Heol a ra kement a drouz a-enep troc'h an Alamagn, pe ar pezh ne fell ket dezhe gouzout kentoc'h marteze, eo stad ar broioù all a vez rannet e stadoù all Europa, hag estreget en Europa ar C'huzh-Heol (d.s. Bro-Vongolia); en "hon" Europa ar marc'had digor e vez disrannet broioù ivez.

N'hon eus nemet da sellout ouz Bro-C'hall; an hevelep tra a c'hoarvez en Euskadi, evel just, ha staget ouz Bro-Saoz emañ an hanter-vro a vez anvet "Iwerzhon an Hanternoz" e-keit ha m'emañ tost dieub an eil hanter-Eire-ava.

N'eo ket reishoc'h evit troc'h an Alamagn eveljust, met ne vez ket

soñjet alies er broioù-mañ gant lod brasañ an dud; rak n'int ket broioù komunour, marteze?

N'eo ket plijus buhez tud ar republik kevredel p'emañ o c'herent en hini "demokratel" moarvat, met n'eo ket plijusoc'h buhez tud broioù all Europa 'zo bet troc'h etre daou; daoust ha n'eo ket un arme estranjour a zo o lerc'hel Iwerzhon an Hanternoz? Ha boledoù plastik e lazha a vez ganti ivez, evit menegiñ ur vro nemetek.

Moustret ha mac'het 'vez yezhoù ha sevenadurioù a-ziforc'h an holl Vroioù-mañ. Ma ne vezont ket lazhet ez-korfel, ez-speredel e vezont lazhet avat!

Gallaoued ha gallezed eo tud Euskadi an Hanternoz, evel just (!) ha ret eo dezhe komz gallek, yezh ho bro, hag en em ren evel keodedourien vat ar stad c'hall.

Daoust ha gwelloc'h eo ar stad er broioù-se evit hini an Alamagn?

Un tammig kizidikaetoc'h eo deuet spered Europeiz, ouz ar gudenn a-drugarez d'ar pezh a c'hoarvez gant Bro(ioù?) Alamagn.

Sklaeroc'h-sklaerañ 'vez gwellet diotz an troc'h gante an deiz a-hiziv, ha start e rankomp labourat evit diskouez eo ken sol troc'h Bro-Gatalonia hag hini Bro-Alamagn, da skouer. Buan e rankomp labourat kent

IMPALAERIEZH ALAMAGN



ETRE AR BREZELIOU



ALAMAGN YALTA



ma c'hallfa tud Europa a zo o youchal bremañ a-enep disrann an Alamagn, ankounachaat ar pezh a c'hoarvez du-hont.

R. Baxter

KELAQINN
Kuzenn deizmañ brezhonek - gallek

36-15
TC / KELA

WEE

- Kaler ar vro
- Goullod, Fustod nos ...
- Lerrfod nevez embannet
- Skol Uhel Ar Vro
- C'Heorlod
- Kentelioù brezhonek

EN ASIZOU SANT BRIEG

GWIR D'EN EM ZIFENN ?



Muntr

D'an dri a viz Here e oa Per ar C'hamm, un devezhour 63 bloaz eus Louergad, o tremen dirak Lez—varn Asizou St Brieg. Tamallet dezhañ bezañ muntr Alan ar Bihan, 64 bloaz, en e di e Benach, d'an 8 a viz Mae 1988.

A—hed ar breduoù e nachas Per ar C'hamm bezañ kirek d'ar muntr, petra bennak m'en doa sinet e anzavadenn e ti an archerien, ha kondaonet e voe da 5 bloaz toull bach.

Diskleriet e voe gant ar gazetennerien, en o danevellou, ne voe ket an tamallad lenn, ha ne oa ket evit kompren hag evit komz gallek. Un eil afer Frañsez Laorañs?

Goulennoù

Souezhiñ a c'haller eta o klevout en doa sinet Per ar C'hamm un anzavadenn ne c'halle ket lenn e ti archerien Benach.

Dirak ar barner—enklasker ha dirak al Lez—Asizou n'en doa bet gwir da gaout ur jubennour, pezh zo kontrol d'ar zifennadurioù meliad 407 Reolennaoueg Prosezadur ar C'hastizoù (pa ne oar ket an tamallad gallek a—walch e rank kaout skoazell digant ur jubennour), pezh a ya a enep da ziferadurioù meur a emglev etrevroadel sinet gant Bro-C'hall (Emglev Europeat Gwiriou Mab—den, Emglev Etrevroadel a—zivoù ar Gwiriou Keodedel ha Politikel, Emglev Helsinki) pezh a zo ober fae war Diskleriadur Etrevroadel Gwiriou Mab—den e 1948.

Daoust hag ur prosez reizh en deus bet Per ar C'hamm?

Ar brezhonek, e—maez al lezenn

Ur wech ouzhpenn e voe bet gwelet pe zoujañs o deus al lezioù barn ouz hon yezh ...

Peadra e oa da engarvel al Lez Terrif—Barn (war ziazez meliad 407 Reolennaoueg ar Prosezadur Kastiz) m'en dije karet ober alvokad Per ar C'hamm, an Ao. Blandin, bet alvokad servijoù ar Paramanterezh (DDE) a—enep da stourmerien SAB en aferioù panneloù livet. Re ziwizhat bremañ avat.

N'eo ket bet difennet devezhour Louergad kenkoulz ha m'en dije gallet bezañ, forzh pagen kablus e ve.

Embannet o deus SAB ha Skol An Emsav e kavent direzh stumm ar prosezadur : get ebet pe dost er

c'hazetennoù gallek. Souezhus, emezit—hu ?


Yann Leskic

(Notenn : Frañsez Laorañs a voe bet fuzuilhet e—pad ar brezel bed kentañ, evit bezañ disentet ouz urzhioù ha ne gompren ket.)

Difennerezh

Klevet ho poa komz eus afer ar gavrredigezh "Carrefour du Développement", ma oa ar c'hannad P.S. Christian Nucci da vevañ barnet al Lez—Varn Uhel, hervez mouezhiadeg ar Gambr. Dizolvet eo bet gant alvokad Nucci e oa nul ar vouezhiadeg—se dre ma oa bet votet gant kannaed ha ne oar ket er Gambre en devezh—se ! Saveteet dilennad ar bobl, an c'hallo ket bezañ barnet ken, a—hervez. Labourat mat a ra alvokadoù !





Taol Pluenn

BASTA !


GWENEDOURIEZH

Dedennus am eus kavel displegadurioù istorel Paskal ar Marc'heg diwar-benn brezhoneg hag aler (ne lavaran ket "kudenn") ar rannyezhoù ha dreist-holl ar gwenedeg.

Neoac'h e vefe un nebeut traoù da lavarout. Mat eo da Baskal ar Marc'heg reiñ displegadurioù hiroc'h en ur gelaouenn evel **BREMAN**, siwazh ez eo reiñ lavarout e vo lennet gant nebeut a-walc'h a dud (digarez da **VBREMAN**). Padal ez eo bet lennet ar pennad (4 kolonnenn) en deus embannet e-barzh **Ar MEN** gant miliadoù ha miliadoù a dud, e Breizh hag e lech all.

Dedennus e oa ivez ar pennad-se eus **Ar MEN**, dreist-holl ar penn kentañ, met an doare da ginnig an traoù da denne kalz da varnagannoù diwar-benn lod eus pobl Vreizh. Menegiañ a rin, ma bermetit, frazennoù gallek tennet eus ar pennad-se, peogwir ez int a-bouez : [goude ar brazel-bed kentañ] *les Vannetais, les Morbihannais [an holl anezho ?] refusent ce changement [ur yezh diazeaz unvan] ... les parlers [sic] vannetais apportent peu à la langue de base. Les Vannetais s'y sentent moins attachés matériellement [?] et, surtout, psychologiquement [daoust hag eo "stag, ez psikologel", poblañs an eskoptoù all, pe an departamantoù all, ouzh ar yezh unvan ?], ha ma vefe dreist-holl un afer a intelektaled ? ... les Vannetais apportent peu au capital culturel commun qui s'accumule d'année en année ... l'isolement actuel des Vannetais [...] est dû à l'absence d'outils que les Vannetais auraient pu forger, comme les autres, depuis un demi-siècle ... s'il existe une culture de langue bretonne moderne, vivante, capable d'intéresser les jeunes, c'est parce que les bretonnants actifs ont accepté l'autorité d'une langue de base unique. Sans elle la situation du breton serait, partout, celle du breton en pays de Vannes.* kement ha lavarout n'eo ket brezhonegerien Bro Wened tud oberiant, bev, modern ha gouest da zedenniñ ar re yaouank ...

Hag evit proufiñ kement-se e skriv Paskal ar Marc'heg : *"Le breton [ne skriv ket : ar brezhoneg lennegel skrivet e eskopti Gwened] garde, en pays de Vannes, un aspect archaïque"* hag e tispieg penaos n'eo gouest ar Wenediz d'ober war-dro nemeur ur gelaouenn mod-kozh pa vez tud voderem kreiz Breizh o kas war-raok ur medium a-vremañ, Radio Kreiz Breizh. Ha Radio Bro Gwened ? *"Les Vannetais ont peur de la modernité"*, sañset ; war a seblant n'o deus ket ; ket muioc'h eget ar vretonek all ato.



Komz a ra ivez Paskal ar Marc'heg diwar-benn "aotrouniezh" ar yezh unvan, o tispiegañ n'eo ket "impalaouriezh". Ret eo anzav na seblant ket P. ar Marc'heg kaout c'hoant da drevadenñ Bro Gwened : *"ils peuvent [...] constituer une enclave conservatrice dans le monde bretonnant Nous ne leur refuserons pas leur autonomie" (ni = ar Vretoneg/vrezhonegerien val'reizh, enebet ouzh ni) ;* Ha krediañ a ra koulskoude skrivañ e vefe ret "éviter de reproduire en Bretagne un clivage aussi désastreux que celui qui, en France, sépare Paris de la province"; daoust hag e welle P. ar Marc'heg Bro Wened evel ma vez gwelet ar "proviñs" gant pennoù bras Pariz ?

Ar pep lipousañ evit ar fin : sañset eo kirek ar Wenediz pa'z eo aet da get ar brezhoneg e Bro Naoned. Wanted ! Ret eo klask kiregezhoù ! Piv 'zo kaoz : tud Pariz, tud Bro-Naoned o-unan, o amezeien ? ha perak ? Setu ar respont : *"L'un des facteurs de la débretonnisation du Pays Nantais est sûrement le manque de personnalité des Vannetais. Le Pays de Vannes est certes très beau [trugarez evit ar gweledva] mais, objectivement [sic, adarre], il nous serait plus utile d'avoir pour voisins des Trégorois"*, sell 'ta ! n'eus ken gwelet penaos eo bet ar vrezhonekaet en un doare burzhudus Bro St Brieg abalamour d'o amezeien varzhus a Vro Dreger !

Peadra a vefe da c'hoarzin gant seurt frazennoù a-dra-sur, ma ne vefe ket heñvel o liv ouzh hini ar gouennelouriezh, ha ma ne vefe ket bet embannet seurt diotachou en ur gelaouenn ken bras-skignet hag **Ar MEN**. Diémad d'en distruje (e berton guened displeberet penn-da-benn).

Anshel BABEL

M'HO PEUS C'HOANT BEZAN
Kelenner(ez) pe Animatour(ez)
EN OALED
e-pad ar vakañsoù, n'ho peus ken skrivañ pe bellgomz deomp
Ezhomm ez eus tud atav !
☎ 06.01.07.01.



ADKOUMANANTIT 150 lur ar bloaz DA V- bremañ

bremañ 12

Gallegouriezh

WOOD PARK



Da heul va fennad embannet war niv 97 hor c'helaouenn ("Gallegouriezh Adarre") em eus kavet daou dra :

1 Pelec'h emañ "Spring Field" ha "Wood Park" m'eo bet feuket ganto an Ao. Roux, ur senedour anezhañ : e gavred Pariz emaint, e-kichen Evry ; gwerzhet int gant ur promotour bras ("Kaufmann & Broad" a werzh ivez, en hevelep rannvro : "Grenn Land" ha "Spring Lane".

2 Respont an is-ministred euz da c'houllenn an Ao. Roux, embannet war "J.O." an 23.09.89 ha laketañ ganimp e brezhoneg evel-mañ :

"Evel m'eo bet merket gant ar c'hannad enorus (d.l. eo : an Ao. Roux, "honorable parlementaire"), e vezer feuket o welout e vez roet anvioù angl-ha-sakson(1) o doare da veur a varc'hadourezh ha zoken, a-wachou, da anvioù-lec'h. Evelato n'eus bremañ lezenn ebet evit berzañ an implij eus seurt anvioù. Lezenn an 31.12.75 diwar-benn implij ar galleg a gemenn, en ha mennad kentañ, "eo reiñ implijot ar galleg evit envel, kinnig, diskouez, brudañ dre skrid pe dre gomz ... ur mad pe ur servij"; koulskoude ne vez ket e vefe roet un anv estren(2) d'ur varc'hadourezh bennak, gant ma vefe hec'h anv ur merk kenwerzhel diskleriet a-ratozh ha gant ma vefe skrivet e galleg peira eo ha penaos ober gant. An arouezoù kenwerzhel kennebeut n'eus evito reolennadur ebet e-keñver o yezh, pezh a zo lec'h da wall-implijou evel ar re a zo bet meneget gant ar c'hannad enorus.

Abaoe 1975 ez eus bet kinniget gant lizil zo eus ar Parlamant(3) e vefe kreffvaet al lezennoù diwar-benn an daou boent-mañ (d.l. eo : anvioù ar marc'hadourezhioù, hag an arouezoù kenwerzhel). E-keñver an anvioù-

lec'h e vez roet pep frankiz da faltaz(4) an dud, gant ma ne vefant ket anvioù aozadurioù foran ("Collectivités Publiques") pe anvioù ofisiel evel re ar c'humunioù ("portions de communes")(5). Bez e c'hallfed bezañ douget eta da glask doareoù mat da herzel ouzh ar gwall-implijou e vez degaset gant al lec'h brasoc'h-brasañ a zo hini ur yezh estren e buhez an nasion(6) E-keñver labour Kuzul Meur ar Galleg, savet gant an dekred niv 89.403 eus an 2.06.89, "studiañ, e framm ar "reletradurioù bras roet gant Prezidiat ar Republik hag ar Gouarnamant, ar c'hudennoù diwar-benn implij, gwellaadur, piviñkaadur, ha skignadur ar galleg e Bro-Frans hag er broioù estren, kinnig ur politikerezh e-keñver ar yezhoù estren ... " ha "reiñ d'ar Gouarnamant kement all a zo ret".

(1) Evit an is-ministred euz evit ar c'hannad enorus) n'eus ket a saoznegerien, met "angl-ha-saksoned" evel 1500 vloaz zo (ha n'eo ket 15 aveljust, evel m'eo bet merket dre fazl war niverenn 97 "Bremañ").

(2) Kement yezh n'eo ket gallek a zo estren, eta !

(3) Mat e vefe gouzout ha kannaded eus Breizh (deputadae pe senedourien) a zo bet e-touez an istrogelld-se.

(4) Pep tra n'eo ket galleg a zo faltazius, eveljust !

(5) daoust hag e vez aotreet neuze laketañ anvioù brezhonek war ar panellou-hent ?

(6) An "Nation" unan ha dizisrann, n'eus nemet galleg ganti !

Daoust hag e vo kreffvet lezenn 1975 (ken unyezhoù he danvez dija !) ha berzet hizviken komz ha skrivañ saozneg (ha brezhoneg !) en un doare foran ?

B. Kadoried

(ha war ar pennad orin, hel)

Kemenn

RADIO

PARIZ

RADIO-BRO 88.9 MHZ (BRO PARIZ)
Boest post 639 75367 Pariz
cedex 08 pellgomz 47610075

Abadennoù divyezhek bep gwener da noz deus 8e da hanternoz ha bep sul da veure deus 8e da 11e.

Programm muz DU 89 d'ar gwener da noz :

8e kinnigadur program an abardaevzh ha sonerezh
8e 30 Pennad-stur gant Serj
8e 35 keleier (brezhoneg ha galleg) gant Maj ha Serj
9e Mesk-Divesk (keleier savnadurel, gouelioù, festoù-noz, c'hoarioù ...) gant Yann-Fulup
9e 45 e-pad ur c'hardour e vez tu bep gwener da gas Kemennadennoù da G. Kabon a vez selaouet gantañ Radio Bro en toullbach.
10e Breizh hiziv

d'an 3/11 : Stad an traoù e hanternoz Iwerzhon
d'an 10/11 : Mojann an Ankoù : ur studiaden diwar-benn Anatol ar Braz gant Doming
d'ar 17/11 : magazin ar brezhoneg gant Serj
d'ar 24/11 : ekonomiezh gant Yann Fievet


11e abaden sonerezh
d'an 3/11 kaset en-dro gant
"Derrière de chez mon père"
d'an 10/11, kaset en-dro gant Ti ar Vretonek
tud Radio-Bro
d'ar 24/11 : kan ha diskan gant Maoris Poullmarch, Serj h.a.

PEDERNEG

D'ur sadorn 25 a viz DU 89
FEST-NOZ
Strobonell
Gwallbardon
Gwenegepa
Fecan
Machel
Bernard Lasker

bremañ 13

Forzh petra



SKINWEL, GOAP HA DOUR C'HWEZ-VAT

D'ar Sul 1^{añ} a viz Here e voe skignet "Les Sirènes de minuit" war A2, ur film tele tennet -saisnet- eus levr dispar Jean-François Coatteur. Siwazh, teir gwech siwazh ! Eilpennet e oa an istor, "suspense" ebet, cheñchet penn da benn personelezh an dudennou, roud ebet eus aergelch kêr Vrest hag he forzh ... roud ebet e tremen an istor e Breizh zoken. Ha dreist-holl, lammet kuit an holl duoù politikel -ar Frañs faskour, ar meskaj etre ar polis hag ar politikerezh, oberezh Ti-Kêr Brest gant poltreoù a-zoare (deoc'h da zivout eus piv "zo kaoz ..."), oberezh polis politikel ar MAC/PAC/Quartz hag he rener ... Doujañs ebet ! Brestiz -o vreskenn- ha Bretoned all, tout an traoù ho peus c'hwitet m'ho peus sellet ouzhi ar film a c'hellit kavout en ur lenn al levr -mat ha marc'had mat- hag ouzhpenn-se e c'hellloc'h evel-se anavezout ger-stur diwezhañ an FLB !

N'eus ket pell 'zo ivez ez eus bet skignet un abadenkanoennou anvet "Escale a Montréal", gant kanourien galleg eus Amerika, Europa, Afrika, h.a. Goap 'oa bet graet un tamm ouz ar Challaoued -dreist-holl tud ar show-biz- hag a implij ar "franchisazneg". Met, gwashañ zo, kredet 'z eus bet ober goap war ar Frañsien-se hag a lide "les deux cents ans du deux centième anniversaire du Bicentenaire". Doujañs ebet !

War an holl chadennoù skinwel (eus Canal+ betek TF1) ho peus gallet klevout komz diwar-benn dourioù c'hwaz-mat lakaet war ar marc'had gant Enrico Macias pe Stéphane de Monaco (honvezh 'zo

eus ur familh a orin breizhat, doujañs mar plij). Petra c'hortoz 'la Tabarly pe Niagara ? Petra c'hortoz ivez ar c'hambreier a genwerzh hag an tiez a douristelezh evit kas saurt produioù war-raok, dreist-holl gant an douristelezh c'hwaz vat an Anvor gant c'hwazh ar mor (gant un tammig holen eus Gwennrann e-barzh marteze ?), hini an Argoad gant c'hwazh ar c'hoadoù d'an nevez-hañv (pe ar skebell-touseg d'an diskar-amzer), boutailhadoù ispisial en arvor "Amoco, parfum de scandale", "Marcelin's perfume", gant ma ne vefe ket re lakrimojen ... afe-shave ar stourmer-nouz (met lezel a rafe roudoù du war ar fas marteze ...); kasit menozioù da Yves Rocher -hag en deus ezhomm da vezañ freazet er mare-mañ.

Pravda ! (Gwirionez)

Ar bloaz a zeu e teuo meur a strollad arzourien eus ar CCCP (URSS) d'ober un droiad e Breizh. Gwall-chaliet eo dija servijoù polis Bro-C'hall gant an aler-se, dezho da evezhiañ peseurt darempredoù a zo hag a c'hellfe bezañ e-pad an droiad-se etre strolladoù an emsav breizhek hag an CCCP. Daoust hag e vo dizolbet, a-benn ar lin, ar wirionez ?



Sieg, Sieg, Sieg ...

N'eus ket kalz a riskloù e vefe douetañs war ar PNB nevez da gaoz darempred gant an CCCP, hag e vefe fregaset gant ar polis, pa gaver ennañ -hervezo o-unan- hered Mordrel, Debavais ha Lainé.

Daoust ma ...

Anshel BABEL



KAFEDI-TI KRAMPOUEZH abadennoù-nouz A-BEP SEURT

Etre ROAZHON ha DINAN (ul lec'h plijus, degemer e brezhoneg, da 25 mn eus Roazhon !!!)

E niverenn diwezhañ ar gelaouenn "Armor Magazine" evit ar miched, Goude ar rubrikenn "jardinage" (eo, eo). Er ranngazetenn-se e kaver keleier dedennus a bep seurt : ar seurtoù diennou evit an dremm pe ar c'horf, ar soavonoù liesliv Roger & Gallet, ar toreh-levr Spontex nevez ... hag ivez



no comment.

Ur c'heloù mat ar miz-mañ : aet da get raktes ar park EUROCELE e-kichen Gwengamp. Ouf!

Anshel BABEL

Kemennadenn

BOIKOTOMP

SCOLA 89, "saloù europeat an Deskadurezh", hag a vo dalc'het e Roazhon etre an 3 hag ar 7 a viz Du 1989, a zo e bal displegañ raktesour bras hag oberiantizoù pennañ an aozadurioù europeat ha diskouez liesseurtgezh an doareoù desaval bugale e meur a Stad eus Europa.

Gwall souezhet hag abaf e chom Kenanmglev evit Rannbarzh Breizh gant aozadur ar c'hendiviz-se. Da gentañ tout e c'heller en em c'houlenn -pa weler peseurt danvezioù a vo kaoz diwar o fenn (politierezhioù deskadurezh ha lakaat ar re yaouank da vont er gevredigezh-lusk-bevañ an Europeaned yaouank - ar vugale, keodedourien ar skol en Europa - ar re a ziviz war an Deskadurezh en Europa)- perak n'eo ket tirouret mat c'hoazh ur velstradurezh ken galoudus hag an Deskadurezh Stad-gall diwar-bann ar c'hudennoù-se. Ma n'eo ket, ez eo souezhus e vefe ret d'ar Ministrerezh gortoz e kemerfe kêr Roazhon an douer da zivankout an diouer-se. Douetañs a zo da gaout ivez, pa ne ro Ministrerezh an Deskadurezh nemet 300 000 lur, da c'houzout hag-eh eodennet gant ar c'hudennoù-se.

Er c'hontrol, an 200 000 a dud a vev e kumun Roazhon a baev 4,5 milioù a lurioù evit ur c'hendiviz hag a zo dedennus dreist-holl evit an Deskadurezh-Stad Gall, hag a zo ivez un taol-media savet gant an Ti-Kêr evit a-unan -gant ar soñj kuzh da grouñ Europa ar C'hêrioù bras, ha n'eo ket Europa ar rannvroioù- ur c'hendiviz n'en deus pouez rannvroel ebet ha pal european ebet, war ar seblant. Ha ne seblant ket kaout, p'he deus nac'het ar CEE reiñ an 300 000 lur he doa goulet kêr Roazhon.

E-lec'h lakaat ar'chant en ur c'hendiviz ouzhpenn, daoust ha ne c'heller ket lakaat ar'chant e traoù pleustrek, skolioù-skouer, ur gwir digreizennadurezh eus Deskadurezh Stad, anzavidigezh al labour graet evit kas war-raok yezh ha sevenadur Breizh, ha yezhoù ha sevenadurioù rannvroel en Europa (e-touez ar broioù a vo studiet e-kenver liveoù disizent ha digreizennadurezh, perak eo bet akounac'haet Bro-Spagn ?). N'eo ket bet dedennet an aozourien gant tra pe dra o tennañ da zibardellezh an deskadurezh e Roazhon hag e Breizh. War ar seblant ne vo kaoz ebet, evel e 1988, eus an divyezhezh brezhoneg-galleg,

gant ur 700.000 bennak a vrezhonegerien, padal e vefe bet tu da studiañ penaos e sikour an divyezhezh-se da studiañ yezhoù all eus Europa, hag eus lec'h all. Ma vije bet dalc'het kont eus ar brezhoneg, e vefe bet tu marteze da gaout ur yalc'had gant ar CEE abalamour da bouez rannvroel hag europeat ar raktes.

Ur wech ouzhpenn e tisoñj kêr Roazhon al labour he deus d'ober evit reiñ lañs e Breizh, ha n'eo ket

dedennet gant dibardellezhioù Breizh : kelennadurezh ar brezhoneg, istor ha sevenadur Breizh.

Goulenn a ra K.R.B. gant an holl gevredigezhioù a labour evit difenn ha kas ar brezhoneg war-raok chom hep mont d'ar c'hendiviz-se hag hep anavezout anezhañ, ha klemm a-enep an dispign ar'chant a vez graet eno (6 063 000 a lurioù hervez ar rak-budjet) !!

Y. Ropars, an anv Burev K.R.B.



SCOLA '89 : KEMEROMP PERZH

Pa kinnig KRB "boikotiñ" SCOLA e c'halv re all da gemer perzh en divizoù. DIWAN, da skwer, ay ay evit sevel he mouezh. Lavaret d'ar pennoù bras ha d'an dud a vo petra eo ar Brezhoneg, peseurt pouez ha peseurt lec'h he deus yezh ar vro da gaout en deskadurezh. Pa ne ve ken e soñj da ZIWAN eo a-bouez kemer perzh e SCOLA hag a c'halv an holl da vont ha da sevel o mouezh evit ma ne vo ket komzet eus deskadurezh en Europa hep derc'hel kont eus ar yezhoù hep stad. Azalek an 2 betek ar 7 a viz Du e vo dalc'het divizoù SCOLA e kreiz-kêr Roazon : sal ar sportoù, Tachenn Veurzh...

Gw.CARADEC

Levriou

Nevez embannet:

"LEVRIG AR C'HRISTEN"

Emañ o paouez dont er-maez, embannet gant "Embannadurioù St Erwan", Rostren, ul levrig, e vent 15,5 war 11, 171 pajenn ennañ, gant ur golo plastik glas, ennañ testiennou pouezusañ an oferenn hag ar vuhez kristen:

- Ordinal an Oferenn santel.
- Testiennou tennet eus ar Skritur Sak.
- Kanennoù santel troet diwar al latin.
- Pedennoù.
- Kanennoù santel diwar ar Psalmoù.
- Kantikoù hengounel ha nevez, renket hervez an implij er bloavezh kristen.

Ar priz : 60 lur pep hini.

Kuit a vizoù-kas : 20% a zistao evit dek hag ouzhpenn, 25% a zistao evit hanter kant hag ouzhpenn.

Goulennit al levrig digant Yann Talbot, Presbital, 22110 ROSTREN, Pellgomz 96 29 01 55

A-RAOK LENN CHOLORI...

GOULENNIT AN ADTRE DIGANT "HO PUGALE !!"



"Les Cahiers du Trégor"

Guy Castel bet ganet e Pluzuned e Bro Dreger a ginnig deomp ul levrig bet savet diwar kontadennoù Marc'harid Fulup. Ur vuzeuz a vev e Bro Dreger ar c'hantved paseet hag a anveze kantadoù a gonchennoù hag a werzioù. Da 38 vloaz e anavez 200 sonenn ha 150 konchenn a skriva Fañch an Uhel.

Evit Anatol Ar Bras e oa ouzhpenn ur vuzeuz met an "hengoun enkorfet".

26 kontadenn a vo kavet el levrig-mañ, embannet e brezhoneg hag e galleg ha diellenet gant Guy Castel. Embannet eo bet al levrig gant Les Cahiers du Trégor.



Breizh Bemdez bremañ

AL LEC'HANVADUREZH

Jean Marie Ploneis a ginnig deomp ul levrig war al lec'h anvadurezh. Petra eo plas an anvioù lec'hioù keltiek en hon bro; En ur zerc'hel kont eus ar cheñchamantoù en em gavet gant ar yezhoù keltiek e klask J.M. Ploneis sevel un henten evit fuchal e-touez ouzhpenn 2000 anv-lec'h. Un tamm sklerjenn a zegas e-giz-se war pouez ar brezhoneg en anvioù lec'hioù...

E dachenn eo hini e vro c'henedik, da laret eo ar Menez, Menez-Arre. An anvioù-lec'hioù zo un testienn eus buhez an dud hag ar gevredigezh gwechall : al labour-douar, an industriezh, an artizanelezh, an noblañs hag ar veleien.

Ul levrig a servijo d'ar brezhoneger ivez rak lod eus an anvioù a zo e stummoù kozh ar yezh ha ne vezont ket aes da gompren evit ar brezhoneger a-vremañ. Ul levrig savet e galleg gant Y.V. Ploneis, kelenner war ar saozneg e Douarnenez ha klasker war ar Brezhoneg er C.N.R.S., embannet gant an ti "Felin".

Naig Rozmor : "KANT ISTOR FARSUZ" embannet gant Brud Nevez

Trist ar Vretoned, sañset ! Ur menoz o tont dimp eus amzer ar romantelezh, ma z'eus unan, Tristoc'h e vefe tud Leon eget tud Treger, ha dreist-holl tud Kerne ? Mo deus lakaet Youenn Drezenn ha Maria Prat ac'hanomp da c'hoarzin kement ha kement, sed amañ bremañ Naig Rozmor, ur varzhez anezhi, savet ganti Kant Istor Farsuz evit hor brasañ diduamant.

Sur o devo an holl Vretoned ur blijadur dreist o lenn anezho, ha goude-se och adlavaret anezho e fin ur pred mat" eme deomp an embanner.

Lod a zo fentus-tra, re all blaz ar c'hozh gante marteze, met diaes chom hep lakaat an taol er c'hleuz ur wech an amzer pa skriver istorioù farsuz. Rak diaesoc'h eo skrivañ anezho eget kontañ anezho. Plijadur a c'heller kavout o lenn al levrig, sur !

Y.P.

RADIO ARVORIG
DUMAÑ DUHONT
 PEP SADORN
 ETRE 12 HA 2eur 422 M GWAGENNOU ETRE

Stajou

REDON, ST VISANT AN OUST, dibenn-sizhun studi evit an holl aozet e TI KENDALC'H d'ar sadorn 25 ha sul 26 a viz Du (Live 0 da 4re bloavezh -live aotreegezh). Graet e vo war-dro bugale ar stajidi gant un animatour e-pad 2 zevezh. 350 L. an dibenn-sizhun (kentelioù-boued-lojeiz) ha 250 L. evit ar studierien, tuc hag all... Titour digant SAE- pellgomz : 99.38.75.83. ■

SANT-MALO, e kreizenn la Briantais, dibenn-sizhun studi evit an holl, d'ar sadorn 27 ha sul 28 a viz Genver 1990. (Live 0 da live aotreegezh). Graet e vo war-dro bugale ar stajidi. 350 lur an dibenn-sizhun evit an dud go-pret, ha 250 lur evit ar studierien, tuc, hag all... Titour digant SAE - 99.38.75.83. ■

DUDI : adkroget vo ar miz a zeu gant kreizennou DUDI (kreizennou evit ar vugale brezhoneger) : c'hoari, ober sport, dizoleiñ, kanañ, dañsal, ober c'hoariva, labourioù dorn a vez kinniget d'ar vugale (6-12 vloaz). Div greizenn a vo digoret er bloaz-mañ e Roazhon hag e Sant-Brieg. Animatourien a-vicher a ra war-dro ar vugale. Titour : DUDI 3 straed Hoche - Roazhon - pe pellgomz 99.38.75.83. ■

Ho pugel a zesk pe a gomz brezhoneg ? DUDI a ginnig dezhañ oberiantizoù e Brezhoneg. Evel-se e wellao e Vrezhoneg en ur gemer plijadur a-leizh gant e vignoned vrezhonegerien.

Kinnig a ra DUDI dezhañ c'hoarioù, sportoù, kanañ, dizoleiñ ar sonerezh -keginat traou mat, c'hoariva-sketchoù, daremprediñ mignoned vrezhonegerien all.

Gwellaat e vrezhoneg en ur gemer plijadur ! Setu ar pezh a ginnig DUDI d'ho pugel.

Riwall ar Menn ha Youn Guillanton (animatourien DUDI)



Kroget eo ar bloavezh Skol-Veur en-dro. Gortoz a ra dazont Unvaniezh Studierien Breizh (49 bali

Rochester, 35700 Roazhon) an holl studierien o deus c'hoant da gelañ kenefrezo, da gaoz titouroù, keleier, da gemer perzh e abadennou,

kaozeadennoù, gouelioù Degemeret mat e vint e Kevrann Gallek Skol-Veur Breizh Uhel, e levrac'hoz pe e tavarn ar Gervann.

Sonerezh

AR SONERIEN DU



Triwec'h vloaz ! an oad gour evit brudetañ foeter-festou-noz ar vro.

A-benn bloaz e vo ur pezh mell abadenn veur gant kamaradenn an Naoned, an Tri Yann a lido o ugent vloaz. Sur ha n'eo ket marteze, e-barzh ar chidourennoù kozh e reer ar gwellañ soubenn.

Olympia 85, an darvoud a liden war eun war RBI : pemzek vloaz an Tri Yann ! Eost 87, goulnenn a reas Raymond Riou diganin kinnig war al leurenn abadenn dez-ha-bloaz o femzek vloaz - 15 vloaz ar Sonerien Du, d'ar 15 a viz Eost, liden gant 13 strollad en o bro vigoudenn muian karet !

En em gavet omp en-dro asambles abaoe, diskroget en deus Raymond Riou diouzh ar stur : "Gast, c'hwetek vloaz war vourzh, poent mont da vageal war morioù all !", digouezet Dominig Lardig ha gantañ ur sachad menozioù nevez evit sevel tonioù nevez - nag a startijenn tudaù !

Din-me 'ta ar c'hontoù e penn a-dreñv ar stal. Er penn a-raok eo kinklet brav ar werenn, ken eo un dud. "Tredan" zo bet embannet an hañv tremenet. Enrollat eo bet gant ar studio "Amadeus" eus Brest. Met riñset eo kasedouigoù ar stal dija, goude m'arad a festoù noz. Ne vern, emañ Tonton Goadoue o vreskenn diouzh tu ar skignañ. C.D., pladennoù ha kasedouigoù peadra da zibab evit an hini a fell dezhan bezañ kaset gant awen ar strollad.

Tonioù tredan, tonioù scottish, tonioù da heul, an holl anezho bet peurlipet gant Eric Dureou a gempenne e sonioù diwezhañ evit ar Sonerien Du. Ho pedin a ran ltron da zont ganin evit d'ansal ar vaisenn skosat kanet gant Dominig hag a zo ken drant war he diwezhañoù meurdeuz a-drugarez da veuz naoned ar paotr Yann Goas.

Eric ? ne c'hell ket pakañ e pep lec'h ! Par d'ur c'hoarier football a vicher" eo bet pignet gant ur mell skipailh etrevroadel. Ne ra forzh, skrapet eo bet Dominique robineau digant "Rève de Gossa". Neur ket drouk avat, prestet e vo dezho ur wech an amzer memestra !

Sonerien Du a vez aliesoc'h-aliesañ o seniñ evit hon breudeur divroet kostez Paris, a zo deuet a-benn da gavet ur c'hempeuz etre an tonioù a-vremañ hag an doujañs ouzhi diazezoù hor sonerezh hengounel. Un taol kaer sur, rak niverus e vez ar re yaouank o tañsal war o zonioù hag o terc'hel da zont d'o abadennoù. Ur vicher start, mont war-raok hep sevel an tonennoù poullrenn e vez dastumet gant lod, re strizh o spered. Dre cheñch an eil ezel pe egille, en ur chom war an dachenn, war al leurenn, pe war ar pavez eo deuet a-benn eus o zaol ar Sonerien Du.

Barz o deus graet hag a reont c'hoazh muioc'h mui. Setu skeudenn wirion ur marevezh o vreskenn, tizh de' ! Dimezet o deus an doujañs ouzhi personelezh o bro ken tomm d'ho

c'halonoù ha son ar musik a-vremañ, un eured karantez a bado pell c'hoazh.

18 vloaz, dek pladenn ha c'hwec'h soner atav, Yann Goas, Jean Pierre Le Cam, Herve Kerneis, Dominique Lardic, Gerard Belbeoch ha Dominique Robineau. Sono : Youra Markus, sekretouriezh 98.53.58.52.

Hag ar sizhonioù o tont : d'ar 4 a viz Du e Champigny/Seine, d'an 11 e Naizin, d'an 12 e Kervignag (kendiviz war sonerezh Breizh), d'an 18 e Brest Penfell (10 vloaz skol Diwan Brest), d'ar 25 e Tregon, d'an 2 a viz Kerzu e Kemper d'ar 16 e Metz (25 vloaz ar strollad "Groupe sans gains") h.a.

Gerard Classe

respont

GERIOU-KROAZ MIZ HERE

	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX	X
1	O	S	T	A	L	E	R	I	O	
2	R	O	U	Z	E	G	A	N	E	
3	F	U	R	D	R	E	K	I		
4	E	R	Z	H	E	N	N	A	N	
5	B	Z	H	A	F	A	L	E		
6	E	I	U	T	O	M	M			
7	R	E	N	K	O	M	A	B		
8	E	N	E	R	I	S	R	A		
9	Z	L	A	N	L	E	V	L		
10	H	O	L	L	H	O	A	L	E	

GERIOU-KROAZ MIZ DU 89

	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX	X
1										
2										
3										
4										
5										
6										
7										
8										
9										
10										

A-LED

1. Evit gouzout petra a zo e-barzh - Pezh a ranker daskoriñ.
2. Oberourien-lien.
3. Komzoù-hud.
4. Kas en-dro - En-dro da Lanlev - Ul loen dinoaz kollet e benn gan-tañ.
5. Eviti a glevet peurvuiañ - E-kreiz daou boent.
6. Ur goant a blac'h.
7. Ampart.
8. Evel goueled al lenn.
9. Rakger - Un doue gresian - Ger-mell-
10. Krouet eo bet e 1941 - Koradeg.

A-SERZH

- I Dibrennet - Nepell diouzh ar C'has-tell-Nevez.
- II Arouez ar vaouez.
- III Gant andonioù e pep lec'h.
- IV E Breizh emañ ar beg-se.- Mont kuit d'an daoulamm.
- V Azeulif evel ar Baganed - Un arme brudet mat.
- VI Ar bed all - Ret evit gwariat -
- VII Donezon - Mellkeineg-dour. -
- VIII Reizh kenañ war ar varn.
- IX Touadenn - Ger-mell - Ger-mell -
- X Lakaat e-barzh un arc'hig.

GERIOU KROAZ GANT FULUP AR C'HORDROCH

BREMAN NIVERENN 98

MIZ DU 1989

TAOLENN

Lizhiri.....	2
Manifestadeg e Naoned..	3
Skol Veur Breizh Uhel..	4
Skol Veur.....	5
Skol Veur.....	6
Skolioù Diwan.....	7
Skolioù Diwan.....	8
Keleier.....	9
An div Alamagn.....	10
Asizoù Sant Brieg.....	11
Taolioù Pluenn.....	12
Gallegouriezh.....	13
A-bep seurt.....	14
Scola 1989.....	15
Levrioù.....	16
Stajoù.....	17
Sonerien Du.....	18
GERIOU KROAZ.....	19
Kemennadennoù.....	20

Arpennoù gant UGB ha C.U A.B., Yann Leskildri, Herve Gall, Dominig Jolivet, Soaz Sergeant, Iwan Kadored Gwenael Caradec, Robert Baxter, Bernez Kadored, Anshel Babel, Radio-Bro, Yannig Ropars, Y.P., Dudi, Gerard Classe, F.A.O. ■

Ar vaketenn gant Dominig Jolivet, Lena Louarn, Jean-Michel Roynard, Nolwenn Louarn. ■

Luc'hskeudennoù gant Louis Bence, Lena Louarn, A.F.P. S.Maria. ■

tresadennoù gant Belom, Ma-Lo Louarn, Mikael Baudu. ■

RENER BREMAN Mikael Baudu

BREMAN 8 straed Hoche 35

ROAZON - 99 - 38.75.83.-

BREMAN MIZ KERZU 1989 : 99

Kasit ho pennoù, keleier, kemennadennoù a-raok al Lun 27 a viz Du 1989-Trugares !

Skrivit e-barzh BREMAN !!!!

KEMENNADENNOU

TRI DEVEZH EVIT LIDAÑ BARZH AZ BREIZH

a vo aozet e Brest d'an 23,24
ha 25 a viz Du 89

Kinniget e vo d'an dud, e ti ar
sevenadur (Kwartz):

-d'ar yaou 23 da 8e 30 un
abadenn kan ha c'hoariva gant skolidi
skolaj Diwan, strollad c'hoariva "La
Tournée des Abers" hag Andrea ar
Gouilh;

- d'ar gwener 24 da 8e 30 ur
brezegenn c'hallek gant Donatien
Laurent, rener ar CRBC (Kreizenn an
enklaskoù Breizhek ha Keltiek e Skol-
Veur Brest) ha filmoù "gousperoù ar
Raned" ha "gwerz Loeiz ravalleg";

- d'ar sadorn 25 da 4e ur
brezegenn vrezhonek gant Y.B.
Piriou, kelenner e Skol-Veur roazhon,
ha filmoù "gousperoù ar Raned" ha
"Gwerz Loeiz ar Ravaleg", tennet eus
gwerzioù Barzhaz Breiz.

- d'ar sadorn 25 da 8e 30 un
abadenn sonerezh gant Kevrenn
Brest St Vark ha Barzhaz Trio. Un
diskouezadeg diwar-benn Barzhaz
Breizh avo ivez d'ar c'houlz-se e
Levraoueg Kêr Brest.

Kenaozet eo bet an devezhioù
gant : Kreizenn an Arzoù Pobl, ar
CRBC, Levraoueg Kêr Vrest,
Kanevedenn, Kevrenn Brest St Vark,
Emglev Breizh ha Brud Nevez.

KANEVEDENN, kreizenn vrezhonegerien Brest, a ginnig deoc'h :

- d'ar Gwener 10 a viz Du, da 8e
30, ur brezegenn diwar-benn Galisia
gant Fulup Kloareg,

- d'ar Gwener 17 a viz Du, da 8e
30, ar film brezhonek koshañ a zo,
"Mister ar Folgoad", kinniget gant
Y.Jardin.

An holl abadennoù a vo aozet
e ti Kanevedenn, 21 straed
Inkermann, e Brest.

KEMENNADENN

Bez' emañ Kanevedenn o
klask ur STAJIAD(EZ) S.R.A.

Evit ober war-dro kreizenn
vrezhonegerien Brest. Ret eo D'an
danvez-stajidi bezañ 26 vloaz pe
muioc'h, bezañ dilabour abaoe 2
vloaz, ha gouzout un tamm bennak a
vrezhoneg.

Skrivit da Kanevedenn, 211
straed Inkermann e Brest, pe
bellgomz da Yann-Fañch Kerneis en
niverenn 98.05.21.17.

KEMENNADENN

Bez' emañ embannadurioù An
Here o klask ur STAJIAD(EZ) S.R.A.


Evit ober labour burev e Brest.
Ret eo d'an danvez-stajidi bezañ 26
pe muioc'h, bezañ dilabour abaoe 2
vloaz, ha gouzout un tamm bennak a
vrezhoneg. Stummet e vint war ar
skriverezañ ha war ar brezhoneg.

DEDENNET OMP GANT HO PARREGEZH

Gouzout a rit trawalc'h a
vrezhoneg evit ober gantañ en un
doare aes. Barrek oc'h ouzhpenn war
un teknik resis a implijit pe e-kerz ho
labour pe war hoc'h amzer dudi. Ha
gouest e vefec'h d'ober war dro ur staj
war an danvez-se. Laouen-tre e
vefemp da genlabourat ganeoc'h evit
klask sevel ur staj evel ho c'hoant, e
Treglonoù pe e lec'h all.

Bez e c'hellit skrivañ pe
bellgomz deomp :

AN OALD
29214 TREGLOU
98.04.07.04



GOUEL 10 VLOAZ SKOL
DIWAN BREST d'ar sadorn 18 a viz Du
1989 - Tachenn Penfell - Brest

Abaoe an distro-skol emañ
Skol Diwan Brest e-barzh ur savadur-
skol all a zo bet fiziet ennomp gant an
ti-kêr.

E-barzh al lojamant-se ez eus
peder sal klas, ur sal evit al labour-
dorn, ur sal-debrin hag ur sal sport
400m. Doareoù mat eta evit ar 47
bugel a zo er skol.

Chomlec'h nevez ar skol a zo :
71 straed Beranger e Brest. Pellgomz
: 98-05-08-49

Adalek 3 eur e vo:

- Abadenn sonerezh ha
dansoù gant bugale ar skol.

- Gouren: diskouez a raio tud
skolioù Gouren Gouesnou, Plouzané,
Lanniliz penaos e vez graet Gouren,
mui ur film video ha diskouezadeg
diwar-benn ar sport-se.

- Bagad Plougastell

- Diskouezadegoù: dour-
livadurioù Yann-Ber Guirieg, priaoù,
livadurioù war seiz, pezhioù
gwiaderezh, bravigoù, pezhioù
engraverezh war ar sklent.

- "Ar sake, al loar, ar garantez":
barzhonegoù japaneg bet troet e
brezhoneg ha skeudennaouet gant
Alain Kervern

- Diskouezet e vo labourioù
dorn a vo bet graet gant bugale ar skol
(P.A.E.)

Adalek 9 eur noz:

- fest-noz vras gant Sonerien
Du, Bleizi Ruz ha Tammlès.

LENNERIEÑ VAT

N'omp ket evit gouzout petra c'hoarvez en ho
pro ma ne gasit ket keloù dimp. Gortoz a reomp eta
diganeoc'h keleier, pennadoù, tammoù kazetennoù zo-
ken, lizhiri, alioù...

BREMAN

skoazellit

"bremañ" ho kelaouenn

koumanantit,

adkoumanantit buan !

150 lur ar bloaz nemetken !

8, STRAED HOCHÉ 35000 ROAZON

bremañ